

Añjela Duval (1905-1981)

Mazochisted

1 -

Pe follentez zo krog ennoc'h
tudoù va Bro ?

Pa rit d'ar c'hleuzioù ha d'ar
gwez brezel garo

Distruj' a rit evel tud foll holl
Gened Breizh

He finvidigezh, hec'h enor,
tudoù direizh.

2 -

Piv 'n deus bountet deoc'h en ho
penn mennozh ken sot

'Benn un nebeud mar kendalc'hit
'vo mui ur bod

Na danvez-tan na danvez-
prenn ; 'met douar noazh

Ho pugale un deiz dambrest a
vezo wazh !

3 -

Torfedourien, drouklazherien,
tud diskiant

Mazochisted : evit un nebeudig
arc'hant

Kinniget deoc'h-c'hwi gant Pariz
'vit ho rivin

Komprenet 'peus hoc'h interest
war an tu gin

4 -

Hor hendadoù 'oa bet tud fur
'fardañ kleuzioù

O hadañ, o plantañ warno 'bep
seurt koadoù

Lann ha balan o bleunioù aour :
arouez hor Breizh

Disheol ha goudor d'al labous
d'ober e neizh

5 -

Esper am eus e tigorfet ho
taoulagad

Hag e welfet pelec'h 'mañ 'n
droug, pelec'h 'mañ 'r mad

Ha 'lec'h diskar c'hwi a blanto
gwez a-nevez

Ar gwez zo Kened. Sederni.
Pinvidigezh...

17 a viz C'hwevrer 1978

* * *

Ar Preñv hag ar Valafenn

En noz-mañ 'm eus klevet em levraoueg
Ur preñv-paper o komz d'ur valafenn-noz :
En em silet on etre pajennoù Avicenna

Gwelet kalz eus dornskrid Farabi
Met n'em eus ket meizet c'hoazh prederouriezh
ar Vuhez.

Chom 'ran bepred er memes teñvalded
N'em eus ket kavet ar sklêrijenn.

— Ar valafenn hanter losket gant ar flamm
a respontas :

— An teñzor prizius-se n'e gavi e levr ebet.

Ar birvilh eo a ra bevoc'h ar Vuhez
Ar birvilh hepken eo a ra dezhi divaskell.

22 a viz Here 1974, diwar Iqbal, Pakistan.